

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

## 37. PLAC'H AR MESGOUEZ

( follenn 116 )

An deïs kenta a gwengolo  
 Deïs pardon ar Forest  
 e zeus komposet eur chanson da plac'h ar mesgouez.

en deus gwerset he chontel da vond dar pardon  
 Da prena per hag avalou dha potret hc c'hanton.

Pa erruas er pardon he (hass) da plass ar per  
 erruont an tri pot iaouank enon en he c'hever.

- Ar ça ta, emezi, goazet, a setu aze per.  
 Ar woazet a lavare n'ho devoa ket affer.

hag hi monnet ac'hanne da plas an avalou rus :  
 - Evid ar re man, goasset, n'ho c'heus ket da refus.

- Tavit, Francesa ar morvant, tavit na voelit ket.  
 Dond a reï Guillou ar Moal c'hoas eur wech dho goëlet

Pa vez en he gaeran en deveus choëch godez.  
 A ben ma he karget a reze e hed goers ar gontel.



Moris Follezour 2 janv. 1851

